

# An oferenn

Remarques : diocèse de St Brieuc

Méodie

Ki - ni - gomp ar sa - kri - fis man da zou - e

6  
hon tad ar gwel lan sa - kri - fis Je - zuz war ar - groaz

12  
war - an aoter a bre - men - c'hoaz

1 Kinigom ar sakrifis man  
Da zoue, hontad ar gwella  
Sakrifis Jezuz war ar groaz,  
Waran aoter a bremen c'hoaz

2. En oferenn, e gwirionc(z),  
Korf ha gwad Jezuz, Mab Doue,  
E-lec'h ar bara hag ar gwin,  
Aman dirazoun a welin.

3. Gant ar beleg c fell d'in-me  
K in nig ivez an Oan-Douc  
Vit adori 'vel m'eo dleet  
An tri Ferson eus an Drindcd.

4. Da drugarekaat an Aotrou  
Vit kement a vadelezou,  
Warnoun ha war an holl skuilhet,  
-Abaoe m'en deus krouet ar bed.

5. 'Vit goulenn pardon digantan  
Eus ar pez a zisplij d'ezan  
Ennoun hag en holl bec'herien .  
Ar pec'hejou, ar yenijenn.

6. 'Vit ma hado -nemdez ennomp  
Grasou da grenvaat ac'hanomp  
Enep hon c'horf, an drouks.pcred,  
Hag enep ar bed milliget.

7. Kinnig 'ran c'hOaz ar Sakrifis »  
'Vit hon Mamm saotel an Iliz,  
Ma trec'ho dre-holl er brezel  
Graet a bep tu d'an Ariel.

8. Bremaouden, ô ma Salver,  
E tiskennot war an Aoter  
Kargit a feiz krenv ma ene,  
Ha ma c'halon a garante(z).

9. Ho pet sonj, c'houi Gwerc'hez Vari,  
Hoc'h eus e c'hanet 'vidomp-ni,  
'ta warnan ha warno(u)n  
Eur -sell a vamm, sell ar galon